

Uda

JOB AN IRIEN :

Ar Marh Dall

F. BROUDIC :

An

Embannaduriou

Brezoneg

P.-J. HELIAS :

Ar Weladenn

NEVEZ

N° 26

# BRUD NEVEZ

## KELAOUENN VREZONEG MIZIEG

N° 26 - MIZIOU GOUERE HAG EOST 1979

Rener : Andreo Merser

Sekretour : Jakez Salaun

An oll lizerou ha skridou a zo da veza kaset da : BRUD NEVEZ, 6 ru  
Beaumarchais, 29200 BREST.

---

Priz an niverenn-mañ : 8 lur

Koumanant-bloaz : - priz ordinal : 50 lur  
- koumanant-skoazell : azaleg 60 lur  
- studierien, soudarded : 30 lur  
- broiou estrañjour : 60 lur

Eur houmanant-bloaz a dalvez evid 10 niverenn.

Ar chekennou-bank a zo da veza kaset war-eeun da : Brud Nevez, 6 ru  
Beaumarchais, 29200 BREST.

Ar chekennou-post a zo da veza laket war C.C.P. Brud Nevez 893-94 P Roazon.

---

I.S.S.N. : 0399-7014

Disklêriet hervez al lezenn : Trede trimiziad 1979.

C.P.P.A.P. : n° 34.627

Ar merour : P.-M. Mevel

Moulet gand Ti-moullerez ar Martolod, er Gelveneg (Imprimerie du Marin,  
le Guilvinec).

---

C. evid an oll bennadou.

N'eus ket a aotre d'embann eur pennad diwar Brud Nevez, heb beza bet an  
aotre d'henn ober.

Ar skridou hag ar pennadou a vez embannet e " Brud Nevez ", n'emaint ket  
da veza laket war gont ar gelaouenn heh-unan, war gont ar re o-deus skrivet  
anezo hebken.

Ar skridou ne vint ket embannet a vo kaset en-dro ma vez tu.

---

## TAOLENN

- Digoradur .....	P. 2
- Job an Irien : Ar Marh Dall .....	P. 3
- P.-J. Helias : Ar weladenn .....	P. 13
- Naig Rozmor : Da viken .....	P. 21
- F. Broudic : Tri bloaveziad a embannadurioù brezoneg .....	P. 22
- F.B. : Ar Vretoned o tigemer an douristed .....	P. 39

## DIGORADUR

### Eun displegadenn bennag

*Eun nebeud gerioù a zisplegadur nemedken, da grogi gand an niverenn-mañ, hag a zo c'hoaz hini an hañv. Evel on-eus bet lavaret a-viskoaz, 10 niverenn ar bloaz euz Brud Nevez eo a vez embannet, ha laket e vez diou anezo da gonta evid daou viz. Evelse eo bet kont evid an niverenn 25, hag evelse eo ema kont evid homañ. Beteg fin ar bloaz, da houde, e vo unan beb miz, evel boaz.*

*War-lerh om c'hoaz o lakad an niverenn-mañ da zond er-mêz. N'eo ket diêz deoh kredi ne reom ket ezprez-kaer. Med an oll re a vez oh war-dro Brud Nevez, estreged an dra-ze o-devez d'ober, evel just, labourioù, micher, stourmou, stajou, hag all... Zoken ma vez eun tammig dale a-wechou, ar pezh a gont eo e teufe er-mêz an oll niverennoù a vez da zond, ne gav ket deoh ?*

*Eur zikour bennag on-eus fiziañs da gaoud dre berz ar Chart (ra vezo meulet ?). Ne vo ket tra-walh avad, pell alese, ha ma hellom kreski a-wechou an niver a bajennoù a vez e peb niverenn, e vo diêz deom ober muioh, embann teorioù hag all, daoust pegement a c'hoant a zo ennom.*

*N'eus nemed eur stumm deom d'en em denna, eo deoh-c'hwî, lennerien, da skoazella ahanom ive. Derhel a reom da houlenñ ganeoh da glask peb a goumananter all da Vrud Nevez. Dija, abaoe m'eo bet adlañset ar gelaouenn dindan eur golo nevez, eo bet kresket euz eun tamm mad niver ar goumananterien. Kreski c'hoaz a hell ober avad. Ma rit diouz ze. Konta warnoh a reom eta. Klevet or galvadenn, hag ez ay or helaouenn war-raog bepred.*

*Kenavo benn an niverenn a zeu.*

### AR MARH DALL

" Ar Marh dall " a zo eur ganaouenn-veur kanet gand lazou-kana, kanerien, ha c'hoarierien-vuzik e-giz pop, war doniou kelteieg.

Bez' ez eus enni blaz ar vro ha blaz an amzer-vremañ, er homzou hag er muzik.

Savet eo bet evid kana buhez, poanioù hag esperañs an dud.

Gand Job an Irien, evid pezh a zell ar homzou, ha René Abjean, evid pezh a zell ar muzik, an hini eo bet savet " ar Marh dall ". Kanet eo bet dirag ilizadou tud, e-kerz an hañv tremenet : e Plougastell-Daoulaz, da geñver gouelioù ar Bleun-Brug - ezprez e oa bet savet ar ganenn-veur a-benn gouelioù ar Bleun-Brug; e Kemper, da geñver gouelioù-meur Kerne; er Folgoad hag e leh all. Kanet e tlefe beza a-nevez en eur gêr bennag evel Brest en diskar-amzer, hag bez' e tleje eur bladenn dond er-mêz ive 'benn eur pennadig.

Lazou-kana Penn-ar-Bed, o voda kanerien Blougerne, ar Folgoad ha Gwitalmeze, eo o-deus displeget " ar Marh dall ", skoazellet gand strollad an Triskell, ha renet gand René Abjean ha Job ar Had.

Setu amañ taolenn ar ganenn-veur :

#### Kenta lodenn :

- |                                    |          |
|------------------------------------|----------|
| - Salud dit va bro...              | Tenor    |
| - Douaret eo bet...                | Trio     |
| - Buan eo bet gwerzet peb tra...   | Soprano  |
| - Med bez' eus 'n eun tu bennag... | Laz-kana |
| - Rod da istor...                  | Baryton  |

*Eil lodenn :*

- Et out da get...
- Ha setu te...
- Setu te war bord an hent...
- Kouezet on...

Trio  
Duo  
Quatuor  
Duo

*Trede lodenn :*

- Dalh da alan...
- Dalh soñj...
- N'out ket mouget...
- Gwelet 'm-eus ar vugale...
- Dihun 'ta...

Laz-kana  
Tenor  
Soprano  
Kan ha diskan  
Laz-kana

**KENTA LODENN**

*Salud dit, va bro !  
Douar noaz dizolo.  
N'out mui merhig da vamm !*

*Douaret eo bet  
Dre guz,  
En noz,  
Hag e galleg.  
Poent e oa !  
Mez on-oa ganti,  
Gand he farlant.  
Soñjit 'ta  
E teue tud d'he gweled  
'Vel eun aneval kuriuz.*

*Buan eo bet gwerzet peb tra  
D'ar pillaouer, na Petra ta;  
Kontadennoù, beilladegoù  
Ha kantikoù ha marvailhoù  
Zo ét da heul ar gwele kloz  
Da garga strad ar vengleuz goz...*

*Ha setu te fichet bremañ  
Gand dillad liou, ha faro dit  
O vond war-raog, o vouskana;  
Plahig yaouank, ar bed zo dit !*

*Med bez ez eus 'n eun tu bennag  
En da galon, eun tammig pell  
War da spered, piou oar perag  
Eun diskan skañv evel ar pell;  
Hag e klevez pa vez ar gwez  
O wigourad en avelioù  
Komzou souezuz 'n em zila frêz  
Beteg ennout, en da zoñjou :*

*" Gwisket a-peus dillad eun all  
Nevez da di 'vel ar re all  
Kôzeal a rez yez eur vro all  
Selaou a rez tele eun all  
Warhoaz e vi 'vel eur marh dall  
Warhoaz e vi 'vel eur vro all ! "*

*Rod da istor zo bet torret  
Ha da eñvor bet krignet don  
Gand 'n avel treñk eo bet gwentet  
Ha killet brao gand mouez e zon.*

*Hag ar re goz 'deus komprenet  
Heb ranna grik, dre nerz ar pleg  
'Da ket deread komz brezoneg  
D'ar vugale nevez ganet.*

*Lakêt a-peus war da ziuojod  
Eun tammig bleud gand liou ar roz  
Warzu warhoaz e tro ar rod,  
Echu amzer ar gizioù koz.*

*Med bez e chom 'n eun tu bennag  
En da galon eun tammig pell  
War da spered, piou oar perag  
Eun diskan skañv evel ar pell;*

Hag e klevet pa vez ar mor  
O hrozmolad en aveliou  
Komzou souezuz e toull an nor  
Deut da vaga da hufvreoù :

" Gwisket a-peus dillad eun all  
Nevez da di 'vel ar re all  
Kôzeal a rez yez eur vro all  
Selaou a rez tele eun all  
Warhoaz e vi 'vel eur marh dall  
Warhoaz e vi 'vel eur vro all ! "

Ha klevet 'peus o vond da bell  
Da laboused 'vel penfollet,  
Ha gwelet 'peus o nijal pell  
Da vugale, va bro brevet ?

Hag an neiziu gwiadet kaer  
Zo da viken bet difoupet;  
Et al labour 'vel dre laer  
D'ar broiou all heb lavared.

Ha war e lerb, êt oll war brez  
Da wella tud da glask bara;  
Et int da bell, diêz e oa,  
Foeterien hent a hiz nevez.

Hag e tassion 'n eun tu bennag  
En da galon eun tammig pell  
War da spered piou oar perag  
Eun diskan skañv evel ar pell  
Hag e santez evel eur yenn  
Ar vugale en aveliou  
Ouz da hervel a-bouez penn  
O krial dit o ankeniou :

" Gwisket a-peus dillad eun all  
Nevez da di 'vel ar re all  
Kôzeal a rez yez eur vro all  
Selaou a rez tele eun all  
Warhoaz e vi 'vel eur marh dall  
Warhoaz e vi 'vel eur vro all ! "

## EIL LODENN

Et out da get.  
Eun trafiker broiou  
Heb trouz ebed  
'N-eus eostet da vadou

E strad ar mor  
Eo bet beuzet kêr iz  
E strad 'n istor  
Eo bet lonket or Breiz.

Ha setu te.  
O lammad war madou nevez,  
Ha setu eñ  
O laerez da bôtred bemdez.

Hag en o zi  
Ar pennou braz leun a arhant  
Evel o hi  
A lip o mourrou re gontant.

Ha bern war vern  
Da vugale er hêriou braz  
A zalh d'ho stern  
'Vel me vefe eur stad a hraz.

Bremañ peb den  
A ya war brez, e unan-penn,  
Hervez e benn  
O klask bernia, beza perhenn.

Med ar vuhez  
O trei re vuan a jom divlaz  
Ar bed a-bez  
Heb broiou bihan a zo re vraz.

Setu te, war bord an hent  
Eul labous war da skoaz

*Ha chouchet en da gerhent  
Da vuhez hanter noaz.*

*Ha gand son al labous dall  
E ouel da zaoulagad  
Hag e kouez ar wesken-zal  
A guze dit da stad.*

*" Kouezet on beteg douar  
Dindan gwask eur galloud  
Et on d'an traoñ heb kounnar  
Heb memez her gouzoud.*

*Etre daouarn an arhant  
'M-eus laket va buhez  
Etre daouarn eun érouant  
Eo malet va oll nerz.*

*Eünet on war ar re all  
Ha desket zo bet din  
Ne oan netra heb ar gall  
Na beo na pinvidig.*

*E wirionez aourlivet  
'M-eus lonket 'giz aviel  
Ha da herez a lealded  
'N-eus roet din peb brezel.*

*Gwisket 'm-eus e vennoziou  
Fall ha mad, mesk ha mesk;  
Gantañ oa an teñzoriou,  
Higenneret oa ar pesk !*

*Med al labous war da skoaz  
'N-eus klevet kan ar vro;  
Meutad gwell e-kreiz an toaz,  
E gan zao ennout beo.*

## TREDE LODENN

*Dalh da alan hag e klevi  
Ar bed a-bez o tizalana,  
Deus d'ar zioulder hag e weli  
Eur bed ennout o tihuna.*

*Dalh soñj euz ar re baour  
O kestal an aluzenn  
Euz ar zent livet aour  
A ziwalle o fedenn.*

*Dalh soñj euz pevarzeg  
Euz da dud o tiwada  
Euz kalon da bôtred  
A beb tu o tiwaska.*

*Dalh soñj euz peb brezel  
Dreist da lod 'peus gouzañvet,  
Euz klemmigan ar bugel  
War an tad 'n-eus ket gwelet.*

*Dalh soñj euz deiz ar peoh  
Deiz ar groaz wenn war ar bez,  
Daoust d'ar boan, daoust d'al lorth  
Dorn da vestr a nah da yez.*

*Dalh da alan hag e klevi  
Ar bed a-bez o tizalana,  
Deus d'ar zioulder hag e weli  
Eur bed ennout o tihuna.*

*Dalh soñj euz an dud vad  
Euz kleier an dimezi  
Ar garantez en had  
Soubenn al léz barz an ti.*

*Dalh soñj euz liou an dañs  
En dorna hag er gouelioù,  
Levenez a roe lañs  
Da lammou an tantajou.*

Dalh soñj euz c'hwez ar roz  
Ar gwenan o hutuille,  
Euz enor ar re goz  
A zave ar vugale.

Dalh soñj n'out ket forz piou  
Ha ma nahez kaoud eul liou  
Vo e kañv liorz Doue  
D'eur vleunienn leun a vuhe.

Dalh da alan hag e klevi  
Ar bed a-bez o tizalana  
Deus d'ar zioulder hag e weli  
Eur bed ennout o tihuna.

N'out ket mouget evid atao  
Na touellet da virviken;  
N'out ket marvet dindan ar yeo  
Dindan ludu 'z eus eun elfenn.

Stouvet int oll, an hentou kloz  
Et int da goll, re striz, re goz !  
Hag an hentou bet renket dit  
Ne 'z eont nebleh nemed kas kuit.

Da wenojenn 'peus da zevel  
Sikour breudeur 'vanko ket dit;  
Da wenojenn vo disheñvel  
Pe vi teuzet heb gouzoud dit !

Staget out bet gand eur habestr  
Ha pennasket 'vid eur frapad.  
Perag plega da youl eur mestr ?  
N'eus ket ennout gouenn eun dañvad.

Hag e tihun war da varlenn  
Eur bobl nevez dibennasket.  
Gwalhet ar bleud, da zremm a gemm  
Merhig vihan da vamm garet.

Gwelet 'm-eus ar vugale  
O tena ar homzou beo  
O taskignad 'n o huñvre  
Gwerz ar bobl a dorr he yeo.

Merzet 'm-eus ar re yaouank  
Sounn o fenn dindan an heol  
O kana a galon frank  
'N eur skuba amzer an teol.

Sevel rint ar rivinou  
Ha dihasti drez ha spern,  
Planta rint gwez er hêriou  
Da bignad en tiez war vern.

Arad rint ruiou ledan  
'Vid o rei d'ar vugale.  
An tiez braz tostoh bremañ  
'N em boko 'vel tud pare.

Grizennet vo 'n otoiou  
Ha krizet 'n eurioù labour;  
Dañset vo deiz ar goueliou  
D'ar frankiz o tond d'ar paour.

An tele heb sorhennou  
Ziskouezo blaz ol labour  
Ha da yez hed ar ruiou  
Ne vo mui eun estrañjour.

'Vid an oll beb abardæz  
Vo digor dor ar skoliou  
Bihan ha braz, oll asamblez  
A ziskano da zoniou.

Kavet vo c'hwek an amzer  
Tehet kuit an divroa;  
Ar bôtred chomet er gêr  
'Gavo plah da fortuna.

Ar re goz deuiio en-dro,  
En on touez hellint beva;

*Ar re vihan 'zesko ganto  
Roud ar houmoul, tres ar joa.*

Torret eo dija an dour  
Beure deiz ar frankiz  
Dispak en da ene paour  
Huñvre da yaouankiz

*Diskan :*

Dihun ta, sao da benn  
Ar houmoul du a deh  
Bale ta, gra da hent  
Didamall ha dineh !

Sanket 'peus en douar noaz  
Gwrizioù don da istor;  
Douar da vuhez divlaz  
'Mañ 'n heol e toull an nor.

Digor eo 'n amzer da zond  
Terri 'rez da jadenn;  
Bag ar peoh 'welan o tond  
Nijal ra 'r valafenn.

Breudeur ziwana beb tu  
Gwalh mad da zaoulagad;  
Teuzet eo ar malloz ru,  
GALV AN TREH VO DA HAD.

**DIHUN TA, SAO DA BENN  
AR HOUMOUL DU A DEH  
BALE TA, GRA DA HENT  
DIDAMALL HA DINEH !**

job an irien.

## AR WELADENN

Eun devez euz ar bloaz tregont, dres d'an deg a viz du e oa, da ouel Sant Kleden, Luch ar Boedeg a gerzas d'ober gwel da vab e eontr-paeron a oa o chom e bro ar Hab. Savet oant bet asamblez, Luch o veza kouezet minor abred, setu war goust ar paeron-ze e-noa roet e her, da goulz e vadiziant, da veza eun eil tad evitañ ma c'hoarvezfe gantañ koll e dud, peza a oa eruet dre zic'hafñ.

An daou genderv en em gare ken mad ma reent an eil euz egile " ma zost-a-vreur " abaoe ma ouient ranna kaoz. D'o diou wreg e oa diêsoh en em glevet, hini Luch o kaoud eun tammig erez ouz eben ha homan douget eun tammig, ouz he zu, da vaga re a vrasoni diwar an nebeud a vadou he-doa muioh eged he " zost-a-c'hoar-gaer ". Ouspenn-ze ne oant ket euz ar memez bro ha ne zougent ket ar memez koefou, daoust ha ma oant bet ganet war-hed diou leo ha nebeutoh an eil diouz eben. Goude oll, avad, ober a reent o feb gwella evid derhel gand al liammou familh. Ne oa netra da rebech dezo nemed eun disterra c'hwervoni, beb ar mare, pa veze kaset fallig d'an traoñ boued homañ gand honnez. Daoust hag eun bennag ouzom n'eo bet tregaset biskoaz da ziazeza traoù-a-zo !

An daou ozah, avad, a gendalhe da zougen boned ledan o yaouankiz ha ne oa ket da weled ken nemed war pennou koz. Eun doare dezo d'en em ziskouez kenlodeien evid ar peurrest euz o buez. En aner en em gieve an diou wreg evid sevel prezegenn beb bloaz da geñver Pask evid tenna anezo beteg goloi o fenn moal gand ar gasketenn-joke a zisklerie hiviziken an dud o vond war-raog, int a ree skouarn vouzar. Ar brasa mez a oa gand gwreg Luch, o chom en eur vro doget, e leh ma veze grêt disoujuz euz boned plad ar Hab " ar bern kaoh-saout ", en abeg d'e stumm ha d'e liou a halve da goun ar veuzelenn fresk pa oa nevez evid trei d'ar veuzelenn zeh goude eur bloavez bennag dindan ar seiz amzer. Med petra helle ar vaouez ober ! Sonjet he-doa riñsa

ganti boned he gwaz ha mond d'e zouara en eul lanneg zistro bennag dre ma ouie ne gaved ket eun all heñvel da breña nebleh en diou vro. Luch, avad, ne zileze e voned nemed evid mond da gousked ha neuze e lakee anezañ dindan e benwele. Ouspenn-ze, da betra e talvezfe ? Pôtr war ziwall ma oa, bez e-noa eun all hanter-nevez ma ne daole anezañ warnañ nemed evid mond da weled mab e eontr-paeron. Hag hennez oa dalhet gantañ striz a-dreñv unan euz pemp dor an armel ma ne oa nemetañ mestr war an alhwez outi. Ha bez e rankan lared deoh e-noa ivez pôtr ar Hab daou voned plad ma oa war evez outo ken piz ha Luch evid gwall zesped e hanter-diegez ! E gwirionez, ouspenn ha breudeur oa euz ar re-ze. Ne reent nemed eun e daou gorv.

Pôtr ar Hab eta, Klet e ano, e-noa grêt lared da Luch e hortoze anezañ heb mank d'an deg a viz du, devez gouel Sant Kleden, e baeron en neñv. Kemennet oa dezañ dreistoll dond gand e wreg, e dri mab ha Katellig vian o vond war he femzeg miz. Bez e vefe kalz a draou druz hag eun disterra hini treud hepken evid rei tro d'ar gouvidi da baka o alan. Ha gwin koarennet, kenkaz ma ne garfe ket lod al lëz buoh nag an dour puñs. Ar haser-kelou, unan euz an diweza merserigou a foete ar mêziou gand o stalikerez, e-noa laret ouspenn e tlee Luch hag e diad gortoz paka eun tamm sebezenn du-ze. Dezo dreistoll d'en em renka evid erruoud eur pennadig araog an noz. Chom a rafent oll da gousked e ti Klet e leh ma vefe prientet peb tra da rei dezo gwele deread. Antronoz, da bred kreisteiz, e vefe debret asamblez restachou an deiz araog ma ne hellfe ket Klet hag e famill dond birviken a-benn outo anez sikour an ostizidi. Hag ar re-mañ a lohfe kuit brao-tre d'ar gêr e-doug an endervez.

Abarz mond pelloh, grêt e gefridi gantañ, ar merserig a ziskulias c'hoaz e oa bet lakeet gand gwreg Klet d'adlared e gentel gand aon e tisoñje eun dra bennag pe e-nefe klevet fall. Ar vaouez-se, war e veno, he-doa kalon dorm e-keñver he famill. Moarvad e oant da veza digemeret ganti gweloh eged priñsed dindan ar gurunenn. Evid ar zebezenn, evel just, ne ouie ket petra oa outi, med dao oa dezo beza war-hed da zigeri braz o beg. Ken skoet oe spered gwreg Luch gand e brezegenn ma prenas hi digantañ teir dousenn spillou hep marhata eun disterra. Ha ken prederiet oe Luch ma ne harzas da fenna gwin d'ar haser-kelou nemed goude beza glebiet traoñ an daol penn-da-benn.

Kement-se oa digouezet eur pemzetet bennag a-raog an deg a viz du. Abaoe, gwreg Luch en em zebre krenn pa zoñje he-doa ijinet, a dra zur, he zost-a-c'hoar-gaer eun dro bennag d'he mezekaad heb ober van. Hag an den mad Luch, kustum da veza teodeg awalh, ne ouie ken nemed

ranna ya pe nann, ha c'hoaz gand mil boan, pa veze bet goulennet outañ diou pe deir gwech ha kaset-digaset eun dorn dirag e zaoulagad evid dezañ dond endro d'e zantimant.

Ha setu ma teuas an deg a viz du. Ar vugale oe digramennet gand dour fresk euz etredaou bizied o zreid beteg a-dreñv o diskouarn araog paka eur benedise " sañboñ " war o bleo. Goude-ze an oll famill en em gempennas war he gloria dindan lagad didruez ar vamm oh ober eun enselladenn striz war he bagad. Ne oe ket grêt an dra heb daelou ar vugale ha malloziou ruz ar pôtr Luch ne zeue biskoaz a-benn da votoni kolier e rochied na da skoulma e gravatenn, setu perag e-noa kas ouz ar suliou. E wreg, avad, a zalhe da goud eun tiad direbech, kemend aon he-doa da weled o skedi, e lagad du ar Gapenn, an disterra skleurennad zispriz pe zihrad a rafe dezi klañva war he zreid. Prest peb tra, war dro eun eur goude kreisteiz, hi a walhas he bugale gand ar gwella bevañs he-doa kavet hag a leunias he faner du a bourveziou evid boueta anezo epad an hent. Evelse ne vefent ket en arvar da erruoud pezell gand an naon e ti o moereb ha ne vankfe ket da hanter-lared e veve kustum an êligou paour gand eur vouzellenn houlo.

Setu an dud en hent, o staga kaloneg gand an diou leo a gase d'o fal. Evel ma tere, an tad a gerze araog dindan boned plad an digouezioù braz, reud e vruched, o tougen war e gein Katellig vian en eun doare baner aozill war vrikolou grêt gantañ e-unan, mar plij ganeoh. En e gichenn e valee e vab henañ, paket gantañ e zeg vloaz. A-dreñv e teue, dorn ouz dorn, daou bôtr-gevell o bleo rouz eun tam-mig yaouankoh. Ar vamm, en he haerra, a heulie e lost ar vandenn, ar baner du war he brêh kleiz, en egile he disglaoier ma pigose gantañ feskennoù ar gevellad pa reent van da zibarfeti. Plijet e-noa dezi ober d'he zud tremen dre blasenn ar vourh evid d'ar homerezed, o spial a-dreñv o rudo-chou, beza test e oant gwisket dibikouz. Ouspenn-ze, lakeet he-doa en he fenn ez afent dre an hent braz e leh kemer eun hent-treuz, kalz berroh med kaillareg a-dachadou hag e-nefe louzet bouteier he fôtred ha marteze he re dezi, kaer en em ziwall. Honnez a oa moarvad eur vaouez a ouie diouz he dever. Moug a rafe an tost-a-c'hoar-gaer dre veza diêz he fenn ganti.

Euz beaj an devez-se, netra da lared nemed e oe grêt ehan teir gwech war ribl an hent evid debri hag eva. Hag en em gavas an drede ehan a-boan ugent munud araog erruoud. Ne oa ket braz c'hoant-boued ar famill med kemend a veh a

reas ar vamm ma oe ranket kas ar pourveziou da netra. Ne felle ket dezi kennebeud feuka ar vaouez all en eur zigouezoud en he zi gand restachou, tra gouest da verka ne oad ket asur da gaoud awalh da derri naon er Hab. Honnez oa bet savet war an doare seven-tre.

Peuznoz oa ganti pa erruas an dud e porz Klet, ha dister ar sklerijenn. Dirag an ti, pevar skeud a-zav : Klet, e wreg hag e ziou blahig o hortoz. Tamm goulou ebed, avad, a-dreñv ar prenestri. An daou ozah a stardas dorn gwagig an eil d'egile, e-giz ma oant kustum d'ober, araog an taoliou stard war o diskoaz da-heul c'hoarzedennou frank ha penadou-komz berr didalvez an danvez enno. An diou vaouez a reas van da voucha an eil d'eben gand evez evid diwall da zirenka o hoefou. Ar vugale, tri baz etrezo, en em daole sellou abafet. Ma vefe bet skler e vijent bet gwelet o ruzia dre ma estlamme laouen o herent war o lamm-gresk hag an neuz vad oa warno. Hogen, echu oe prim gand an digorou-ze. Ar re-mañ hag ar re-ze a hortoze da rei ar zebezenn pe da baka anezi. Gwreg Klet a bedas familh Luch da vond ebarz war he lerh. En em vounta reent en ale deñval pa oe klevet eur stakadenn, ha kerkent eun all, hag an daou benn euz an ti a oe sklerijennet koulz hag e-kreiz an deiz. Eur houlig a beoh ha setu mouez bamet gwreg Luch.

— Med c'hwi ho-peus lakeet al letrsite !

— Lakeet eo bet ganeom, oe respontet. Ne heller ket koulskoude chom warierh ar re all, kea !

Ar vugale a zigoras o beg war nav eur. Gwelet o-doa dija ar sklerijenn e boull-ze, dindan eun tog houarn-gwenn hag e penn eur gordennig, med en tier a genwerz hepken, ha kredi ree dezo e oa grêt a-ratoz evid al lehiou-ze. Ahendall, droug daoulagad o-doa ganti, kila rejont buan ouz an arrebeuri en eur bara sell war o boutou. Luch a dostaas ouz ar voull-dan, meuleudiou gantañ leiz e henou. Ne hellas ket chom, koulskoude, heb strilla eun dorn, eur wech muioh, dirag ar werenn stanket-ze, da weled hag-heñ e fiñve eur seurt flammenn pe ne ree ket. Ne fiñve tamm ebed. Ne oa c'hwez ebed ganti kennebeud. Evid beza en e vleud, e gwirionez, Luch e-nije karet fronti an eol-douar anvet petrol. Damzelou a ree gwreg Klet o tisplega d'he hini oll gweladuriou ar sklerijenn nevez-se, o rei da gleved penaoz ar re n'o-doa ket anezi c'hoaz, en amzer vremañ, a oa da lakaad e-touez ar paour-kêz treued pe dost. O houzaud e oa douget e hanterdiegez da vaga gwarizi e-keñver he zost-a-c'hoar-gaer, eñ e-noa aon e teufe hi da deurel eun distro bennag, treñk ha marteze leun a zrougiez, o-dije gwastet an êrgelh endro d'ar vodadenn familh. Souezet ma oe, klevet a reas anezi o veuli krenn eben heb dezañ beza kad da zizoloi en he mouez an

disterra ton displijuz. Mad-tre, e soñjas an den mad, evid an abardaez-mañ, d'an nebeuta, on-no ar peoh. Warhoaz vo gwelet.

Eur zebezenn all, avad, a hortoze anezañ goude ar goan a oe eur gwir banvez, selvichet e gwella listri an ti ma n'o-doa ket bet morse c'hoaz an enor outo digand gwreg Klet. An diou verh a zouge bri dalhmad da dri mab Luch. Med chom a reas berr ar re-mañ da lonka kalz a dra, ne oa ket abalamour e oant bet gwalhet en-araog, abalamour d'ar sklerijenn-dredan ne lavaran ket, re greñv evid pôted ma oa ganto diou leo en o divesker dindan o dillajou sul. Katellig vian a oa bet kaset d'ar havell kerkent ha staget gand ar goan. Eur wech kuit ar vugale all da gousked, ar gerent en em gavas etrezo endro d'an daol dirag evachou tomm. An diou vaouez a flepe gwel-pe-well, an daou ozah, laouen da veza asamblez, ne daolent er-mêz nemed eur gomz bennag. Hervez boazet, dalhet o-doa ganto war o fenn o boned plad, ar bern kaoh-saout. Neuze e savas Klet a-ziwar e vank evid mond da zigeri e armel. Dond a reas endro, mezeg eun tammig, gantañ en e zaoarn eur gasketenn-joke nevez flamm.

— Prenet 'm eus eun war an diwez, emezañ heb selled ouz e gomper. Bremañ p'emañ al letrsite e ranker kemer ar mod nevez evid mond d'he heul.

Luch a ziskouezas e staon. Ne oa ket war-hed euz an taol-c'hoari-ze. An diou vaouez a stagas da youhal gand ar blijadur, a zougas meuleudi da Glet, ne badas ket araog dezañ lakaad ar gasketenn warnañ evid dezo gouzoud ha bez e oa homañ diouz e benn, a gerzas da glask war dach ar speurenn ar melezaour troha-baro evid d'ar pôtr en em weled ebarz. Dres e tigoueze ar gasketenn gand tro e glopenn dre ma oa bet grêt dezañ gand e wreg esaea ouspenn eun dousenn outo e stal ar marhadour e leh ma oa bet stjejet ganti, kilpenneg ma oa. Ha bremañ ar gaerellig he fri-tano a ree neuz da veza chomet heb gouzoud tra. Ar paour-kêz Klet en em gave diâz-tre en e roched. Ne grede ket zoken sila eur hard lagad kleiz war-du e gomper ma oa bet treitour dezañ, eur vez. Setu ma oe divehiet ar paour-kêz merzer, goude echu gand ar merhed kana o meuleudiou, pa embannas Luch, heb klask troiou med gand mouez ar gredenn stard :

— Dao eo.

A-boan m'e-noa taolet an daou herig-se er-mêz ma lammas an diou gomer warnañ. Kaer dezañ en em zivenn, e hini a skrapas digantañ e voned plad epad ma sanke eben kasketenn-joke Klet war e glopenn. Hag e tarzas adarre ar youhadennou gand ar seiz meuleudi. Ouz o hleved, Luch a

oa deg vloaz yaouankoh dindan eun erien ha tost oa dezañ kaoud tres eun aotrou. Ne oe ket kredet, koulskoude, lared dezañ e rankfe prena ar memez kabell. Amzer oa ! Dond a rafe da houzoud e-unan.

War gement-se int a yeas da gousked, pep hini gand e brederennou prevez. An devez warlerh a oe eun tañva euz ar Baradoz. Ar vugale o-unan en em renkas ken brao ha bizied an dorn. Klet ha Luch, dindan o bonedou plad, a gerzas d'ar yourh da c'hoari boull epad ar vintinvez penn-da-benn gand aotre laouen o gwiragez. Ken founnuz oe pred ar hreisteiz ha ken plijuz an divizou ma ne oe ket amzer da gas ar boued d'an traoñ araog staga gand kafe peder eur. Ha souezet oe Luch pa ne glevas ket e wreg o sevel gwask warnañ evid mond en hent da zistrei, e-giz ma oa boazet d'ober goude hanter-dreñket an traoù etre hi hag he zost-a-c'hoar-gaer. Evid eur wech en em glevant o diou war beb tra. E berr, gortozet oe an abardaez-noz evid kaoud ar blijadur d'adenoaui ar goulou-tredan. War an diwez e oe red kimiadi, rag Luch a ranke beza d'e labour antronoz araog goulou-deiz. Lared oe kenavo a-benn touet ruz gand ar gaperien da wreg Luch mond da weled anezi araog goueliou Nedeleg.

Klet hag e diad e fellas dezo ambroug an ostizidi beteg klouedenn ar porz, e-giz ma vez grêt pa ouzer beva. Araog mond er-mêz euz an ti, e vaouez a vougas ar goulou ha Klet a zalhas ar veajourien gantañ da varvaillad epad eur vunutenn bennag dirag an treuzou evid rei amzer d'o daoulagad d'en em voaza ouz an deñvalijenn. Luch e-noa divizet mond d'ar gêr dre ar berra, o klask an henchou douar ha lezennou ar parkeier. Hag e wreg ne oa ket e chal da louza bouteier ar familh peogwir ne helle den gweled anezo ken.

Du-pod an noz. C'hweza ree eun avel a-benn, karget a lugachenn a-vare da vare. Luch a gerze araog, o tougen adarre war e gein Katellig vian pakadennet mad. Ar re all a zeue lost-ha-lost, ar vamm a-dreñv. Goude eur hard leo war an hent braz, e oe pignet dreist eur hleuz uhel, mein plad sanket ennañ war e gostez d'ober dereziou. Hag adaleg neuze ne 'z eed war-raog nemed dre riboulou-gad ha riboulou-bleiz. Luch, avad, e-noa grêt an dro meur a wech da noz hag a ouie ouz ar merkou. Bez e oa euz ar re-mañ mellou mein gwenn sanket en douar e kroaziou-hent da ziskouez an tu mad. Ar re all a oa merouriou kuzet e-kreiz bochadou gwez ha gwerzet hepken gand eur hi o harzal. Eur wech an amzer, koulskoude, an tad a ranke herzel eun tammig d'en em retera. Ha beb tro e oa o hortoz klemmou e wreg a gare en em chala, boazet. da veza dimezet gand eun

ozah ne oa ket kad d'anaoud e du kleiz diouz e du dehou. Ar vaouez, avad, ne zibrenne he beg nemed da vrouda ar vugale ha da doui dezo e ouie mad-tre an tad da beleh e yee. Ne zavas ket droug enni, zoken, p'en em blavas o-daou asamblez, e bouillenn eur riboul, ar gevelled rouz o kousked en o zav dorn ouz dorn. Goude lakeet anezo adarre war o zreid, ar vaouez a zirollas zoken da c'hoarzin. Sellit ta ! Kredi a ree da Luch kaoud war e lerh eur vaouez ne oa ket e wreg.

Tizoud a rejont int erfin ar steudad evleh a gasfe anezo eeun d'o zi hanter-kant paz pelloh. Neuze oe kilpennet renk ar valeerien. Mond a reas ar vamm araog, o tenna ganti an daou rouz dre an daouarn. Ar mab henañ a dremenas e-biou-d'e dad ha hemañ, grêt e zever gantañ, a ruzas eun tammig a-dreñv. Klevet a reas an alhwez o wigourra er potaill, med ne oe ket digoret an nor. E oad o hortoz anezañ araog mond ebarz, eun doujañs ma ne oa ket boazet outañ. Ya feiz, emezañ en e benn, mond a ra peb tra a-dreuz abaoe deh da noz. Hogen, e wreg a vountas war an nor, a yeas tre en ale deñval, klevet oe eur stakadenn, ha kerkent eun all, hag an daou benn euz an ti a oe sklerijennet koulz hag e-kreiz an deiz. Dres e-giz e ti Klet. Re skuiz oa an tri mab evid beza souezet gand tra pe dra. Gortoz a rafent antronoz araog bami ouz an nevezinti en eur gas ha digas ar botonou d'ober goap ouz an heol. Evid ar mare e oant o veva eun huñvre, o daoulagad digor. Ha padal e sellent ouz o zad, e fizient ennañ evid merka an darvoud gand eur gomz a-bouez bennag. Luch, avad, sabatuet ma oa, ne gave ket ar homzou-ze na komzou all kennebeud. Tost oe dezañ zoken koll e vragou abalamour, hep teurel evez, e-noa divouklet e houriz, o kredi dezañ distaga al lereunou a zalhe war e gein baner Katellig vian. E wreg a sikouras anezañ.

— Arsa ya, emezi, ha krena ree he mouez gand al lorch. Ganeom emei ivez, al letrisite-ze. Ha perag n'on-nefe ket anezi !

Neuze e adkavas Luch an daou herig e-noa taolet er-mêz e ti Klet.

— Dao eo, emezañ.

Ez da houzoud. A-bouez klask en he fenn peseurt sebezenn a oa bet prientet gand he zost-a-c'hoar-gaer, ar wreg he-doa kavet ne helle beza outi tra all nemed ar goulou-tredan. D'an amzer-ze, er bourhadennou ha dreistoll war an mêz, kaoud ar goulou-ze en ti a gase war gresk levezon ar familh, er-mêz an êzamañchou a zigase d'he heul eur wech boazet an dud outi. Da genta, lod n'enaouent anezi nemed a-vare da vare hag epad eur vunutenn bennag, en em blijie

gwelloc'h gand al lâmp-petrol evid kalz abegou a gouezas da netra gand an amzer, goude da veleien ar parrezioù beza benniget awalh a dreuzfurmerien ha dispennet doaniou displann ken e teuas al lidadenn-ze da veza eun devez fest. Gwreg Klet, he zost-a-c'hoar-gaer henn gouie, ne oa ket euz ar ree a hortoz keid-all amzer.

Setu perag gwreg Luch he-doa kontet piz he gwenneien, ebarz ar gont he yalh-a-gostez evid an deveziou diêz. O veza ma ye le Luch kuit abred hag a zistroe diwezad d'ar gêr, hi en em renkas gand pôtr-letrisite ar hanton. Hemañ oa dezañ da brienti peb tra dre guz er-mêz hag en ti evid beza e-tail echui e labour epad ma vefe ar famill oh ober he zro war-du ar Hab. Pez a oa bet grêt.

— Ne heller ket koulskoude chom war lerh ar re all, eme Luch c'hoaz.

Deut oa a-benn, erfin, da zivoukla lerennou ar baner. Lakaad a reas ar bugel kousket etre divreh ar vamm ha kerzoud goustadig war-du e armel da zigeri homañ gand e alhwez. Tenna reas a-ziwar e benn boned plad an deveziou braz da renka anezañ brao ebarz. Ha setu aze, oe soñj e wreg, mall zo gantañ teurel e grabanou adarre war e vern kaoh-saout flêriuz. Hogen, pa zistroas Luch, e talhe gantañ en e zaouarn eur gasketenn-joke damheñvel ouz hini Klet. Bez e rankas stourm outi araog he lakaad war e glopenn voal, ne ouie ket c'hoaz mad-tre penaoz en em gemer gand an dra-ze. Tro e wreg a oe da henaouegi.

— Bremañ p'emañ al letrisite e ranker kemer ar mod nevez evid mond d'he heul, a huanadas an ozah.

Ar gasketenn-joke a oa kuzet en e armel abaoe ouspenn tri bloaz.

Per Jakez Helias - Ebrél 79.

## DA VIKEN

Dre va gwazied e red an tan  
A-poa enno eun deiz elumet,  
E va daoulagad e chom flouradenn  
Da zellou kenta, va muia-karet.

E va 'fenn me 'ghev hekleo  
Da vaouez zous ouz va lusked  
Ha trouz mezvuz barrad glao  
Da bokou stank war va muzellou.

Va halon a zalh eñvor  
Da zivreh ouz va briata,  
Va horv stroñs an arnev-mor  
Dirollet warnañ d'e zishuala.

E va spered ema da gomzou  
Ha miret piz, kizellet don  
Kantik da bromesaou  
A dregerno da viken evidon.

Naig Rozmor.

## Tri bloaveziad a embannadurioù brezoneg

Gand an dastumadenn " Studi " (1) eo bet laket da zond er-mêz eur pennadig 'zo " Roll al leoriou hag ar pennadou bet embannet e brezoneg e 1975. " Gand or heneil ha kenlabourer F. Broudic eo bet savet ar roll-mañ a-nevez. Daou roll e-noa bet savet araog, evid pezh a zell embannadurioù 1973 ha 1974. Da hortoz ken e-nevo bet tu da zevel rollou ar bloavezioù war-lerh, on-eus goulennet digantañ peseurt kentelioù a hellje beza tennet euz e labourioù.

Talvezoud a ra ar rollou leoriou ha pennadou, da genta oll, da rei eul listenn ar hloka posubl euz al lennadennou a heller kaoud diwar eun danvez bennag, pe euz ar re a vez bet embannet ar bloavezh-mañ-bloavezh, pe er yez-mañ-yezh. Evid se eo e vezont savet araog peb tra, ha renta servij a hellont ober neuze d'ar glaskerien, d'ar gelennerien, d'ar studieren, ha da beb seurt tud all.

War eur poent e heller poueza en eur dremen : kement hag ober, eo mad, ha red zoken, sevel rollou seurt-se en eur zerhel kont, ar gwella ma heller, euz ar reolennoù a zo o ren e-touez an dud a-vicher, levraouegerien, dokumañtalised, hag all. Arabad kennebeud lezel a gostez referañsoù 'zo, pa 'z int talvouduz oll da anaoud.

Diwar seurt rollou avad, e heller sevel ive studiadennoù, lakom e-keñver yez an embannadurioù, e-keñver al lennegezh pe ar mennozioù displeget. Bez' e heller ouspenn sevel statistikou. Peurvuia, ne vez ket re zod an dud gand statistikou. Tremen hebto n'heller ket ober nebleh ken, koulskoude. Beteg-henn, n'eus ket re anezo war dachenn ar brezoneg; ma vije muioh zoken, e vije gwelloc'h anavezet stad ar yez. Ne glemmo den neuze, emichañs, ma vernian amañ eun duillad anezo, hag a roio gwelloc'h da anaoud.

- 1) petra 'h embanner hag a vouller e brezoneg, peseurt pennadou ha peseurt leoriou;
- 2) pegement a brezoneg a vouller en eur bloavezh;
- 3) ha ped a dud a vez o skriva en or yez.

En eur bloavezh, e vez moulet eun toulladig mad a leoriou hag a bennadou e brezoneg, peogwir eur en em gavet da gaud ar gont-mañ a referañsoù war an tri bloavezh ma zo bet savet rollou beteg-vremañ :

bloaveziad	kont a referañsoù
1973	930
1974	1069
1975	949 (2)

Taolenn 1

Dioustu eo mad addigas da zoñj n'o-deus ket an oll referañsoù-mañ ar memez talvoudegezh, peogwir ne ra darn nemed eun nebeud linennou, p'eo leoriou gwirion eo a zo euz ar re all. En eur roll avad, ne heller nemed rei ar memez talvoudegezh dezo oll, ha lakad pep hini dindan eun niverenn, se 'zo re sklêr.

Dre gevrennoù e oa bet renket ar referañsoù. Esoc'h a ze e heller gweled bremañ peseurt skridoù a vez embannet evid ar muia e brezoneg. War an daolenn amañ war-lerh, e kaver an dregantajoù euz an danvezioù a vez skrivet diwar o fenn en or yez :

	1973	1974	1975
Jeneraliteoù	6,7	13	14,5
Filozofiezh	0,3	0,1	0,1
Relijion	1,5	4,5	3
Politikerezh ha skianchoù sosial	15,9	12,3	15,2
Brezoneg	10,4	9	9,7

Arzou, diduamanchou...	5,4	4,6	5,3
Lennegez	43	43,6	38,4
Istor ha buheziou	9,3	7,4	7,6
Broiou ar bed	6,4	4	5
Skianchou	-	0,1	0,9

Taolenn 2

Eun nebeud evezadennoù a heller ober diwar-benn an daolenn-mañ :

1) n'heller ket lavared e vije bet cheñchamanchou gwirion euz eun eil bloavez d'egile, etre 1973 ha 1975 : war veteg nebeud a-walh, eo heñvel an dregantajoù war an tri bloavez.

2) taolet e vo evez avad ez eo uhel a-walh an dregantad a jeneraliteoù, peogwir eo savet da 14,5 % e 1975. E gwirionez, tost d'eun hanter euz ar referañsoù a zo bet renket dindan an talbenn-mañ - 6,9 % euz an oll referañsoù - a denn da zegouezioù ha da zarvoudoù bet c'hoarvezet pe e Breiz pe e broiou all. Bez' ez euz euz ar re-mañ eta pennadoù berr a gazetennerez peurvuia, hag a vije bet diêz renka e leh all pa vezent skrivet dindan ar stumm anavezet mad en or helaoennoù a " geleier berr. "

3) ahendall, e heller strola ar hevrennoù e tri rumm dre vraz :

- er rumm kenta, e kaver **an danvezioù na vez ket pleustret nemeur warno e brezoneg** : filozofiezh ha skianchou dreist-oll, mez ive relijion, arzou, ha " broiou ar bed ". Daoust d'ar pez a glever lavared aliez, **nebeud a-walh eo e skriver e brezoneg diwar-benn ar broiou all**, ha n'eo ket ken digor-ze or prenestroù ganeom war ar bed a-ziavêz.

- en eil rumm, e heller boda teir gevrenn all : hini ar politiker euz hag ar skianchou sosial, hini ar brezoneg, hag hini an istor hag ar buheziou. Evel a weler, **kalz eo e skriver e brezoneg diwar-benn ar brezoneg e-unan**.

- en trede ha diweza rumm, ne vo kavet da lakad nemed kevrenn al lennegez, ha n'eo ket heb rêzon. **D'al lennegez eo e tenn frankig ouspenn eun dredereñ, ha kaji tost d'eun hanter euz ar pennadoù a vez moulet e brezoneg en eur bloavez**. Hag evel a vo gwelet war eun daolenn all bremañ, barzonegou ha danevellou eo a vez skrivet evid ar muia, koulz lavared kement ha ma skriver a bennadoù istor pe a bennadoù diwar-benn ar brezoneg :

	1973	1974	1975
Barzonegou	9,3	11,6	8,4
Danevellou, kontadennoù, romañchou	9,5	9,9	5,7
Eñvorennoù	6,4	5,3	4,9
Studiadennoù a lennegez	3,3	3,6	5

Taolenn 3

War izellad eo bet eet koulskoude an dregantad a varzonegou hag a danevellou e 1975. Ar souezusa eo eh embanner muioh a varzonegou evid na reer a romanchoù ha danevellou : n'eus ket da gredi e vije kont evelse en oll yezou. Ha c'hoaz, ma vije greet an diforh, e vije marteze nebeutoh a romanchoù evid a leoriou danevellou.

\* \* \*

Beteg amañ eo bet kontet mesk-ha-mesk ar " pennadoù " int o-unan - hir pe hirroh, berr pe verroh, bet embannet en eur gelaouenn bennag n'eus forz penaoz - hag al " leoriou ". An diforh a ve mad ober koulskoude etre an eil re hag ar re all.

Greet e vo an diforh ouspenn zoken etre al leoriou " gwirion ", hag al " leoriouigou " euz ar seurt a vez anvet " brochures " e galleg, hag a vez embannet koulskoude dindan eur golo hag eun talbenn ispisial, ha distag. A-separ e vo kontet ive an niverennoù kelaouennoù bet savet en o fez gand eur skrivagner nemedken pe diwar-benn eun danvez hebken. Ha setu pez a heller lenn war ar pevare taolenn amañ war-lerh :

	1973	1974	1975	en oll
leoriou " gwirion "	6	9	13	28
leoriouigou	-	8	9	17
n° kelaouennoù	9	19	21	49
en oll	15	36	43	94

Taolenn 4

**Ar pez a verzer eo kement-mañ : ouspenn eun hanter euz al leoriou a vez moulet e brezoneg a vez dindan stumm eun niverenn euz eur gelaouenn bennag.**

gouestlet a-bez d'eun danvez bennag, pe bet savet en he fez gand unan bennag. N'eus nemed eun drederenn anezo hag a vefe leoriou " gwirion ". Soñjal a heller dija eo kement-mañ eur zin a baourentez, rag marhadmotos - ha surroh e-keñver ar werz - eo prienti eun niverenn kelaouenn evid n'eo embann eul leor dindan talbenn eun embanner.

Notenni a vo greet ahendall ez eo bet kresket niver an embannadurioù en teir rann, euz eun eil bloavez d'egile. Soñj a ranker kaoud ez eus d'an nebeuta eun hanterdousenn a leoriouigou euz 1973 ha n'int bet kontet nemed ar bloaz war-lerh. Pez a zo a-bouez koulskoude, eo ez euz bet moulet e 1975 eun hanter muioh a leoriou " gwirion " evid na oa bet daou vloavez kentoh.

Ma klasker bremañ renka an oll leoriou-mañ dre zanvez, evel m'eo bet greet evid an oll referañsou araog, e teuer da gaoud an daolenn-mañ, hag a ro niver al leoriou (ha n'eo ket an dregantad) bet embannet e peb rann :

	1973	1974	1975	en oll
Leoriou-studi	3	4	7	14
Studi ar brezoneg (a beb seurt)	-	3	-	3
Geriadurioù	1	5	3	9
Barzonegou	4	5	3	12
Peziou-c'hoari	4	-	4	8
Danevellou, romañchou	3	4	7	14
Kanaouennou	-	4	-	4
Eñvorennou, ednologiez	-	1	5	6
Studi a lennegez	-	1	2	3
Istor	-	-	2	2
Politik	-	-	2	2
Relijion	-	6	4	10
A beb seurt (3)	-	3	4	7

Taolenn 5

Eveziadennoù a heller ober c'hoaz evel just, ha ma vez renket al leoriou-mañ, an oll anezo, e tri rumm, evel a oa bet greet evid ar referañsou, setu pezh a gaver :

- eur rumm kenta a zanveziou na vez ket embannet nemeur a leoriou e brezoneg diwarno : kanaouennou, eñvorennou (med e 1975 dija e oa bet embannet 5 leor eñvorennou, hag abaoe, n'eo ket sur e vije bet tremenet ar

hiz), studiadennoù a lennegez, leoriou istor pe bolitik. Eul leor a skiant (a jeologiez), med leor filozofiez ebed.

- er rumm kreiz, e heller lakad ar geriadurioù - troet e ver da bleidi kalz gand geriadurioù, war a zeblant - peziou-c'hoari (8 pezh-c'hoari a zo kalzig, med er bloaveziou-ze 'ni eo bet adembannet re Valmanche), ha leoriou relijion.

- ar seurt leoriou ah embanner evid ar muia e brezoneg a zo anezo eta, kement-ha-kement, leoriou-studi, ha neuze leoriou danevellou ha romañchou. Ha tost da gemend-all a vez embannet a leoriou barzonegou.

En oll, leoriou a lennegez eo a zo euz eun hanter just ar re a vez moulet en or yez : 47 diwar 94. Ha tost d'eun drederenn (26 diwar 94) a zo diwar-benn ar brezoneg e-unan. Hefivel - ha gwasoh zoken - eo an traou evid pezh a zell al leoriou, hag e oant evid an oll referañsou asamblez.

\* \*

Taoler evez a vo greet c'hoaz n'eo ket dister ar gont a advoulladennoù, peogwir e oa bet 5 anezo e 1973, 3 ar bloaz war-lerh, hag 8 an trede bloavez, da lavared eo ez eus bet 16 advoulladenn war 3 bloaz, diwar 94 a leoriou (17 %).

\* \*

Lavared a reer êz a-walh ahendall e vez troet eur bern traou e brezoneg diwar yezou all. N'eo ket re wir kement-mañ, evel a vo gwelet diwar an daolenn-mañ war-lerh :

	1973	1974	1975	en oll
niver a referañsou a droidigeziou en oll	41	72	34	
niver a leoriou bet troet	1	5	6	12

Taolenn 6

Evid pezh a zell ar referañsou, dre vraz, ez eo izel an dregantad a droidigeziou (6 % e 1974).

Pegement a vrezonég a vouller en eur bloavez ? Gwelom da genta ped kelaouenn a vez laket da zond er-mêz. E pep hini euz ar rollou a zo bet savet, eo bet laket ar gont euz ar helaouennou embannet en eur bloaz. Ne vo ket fall strolia an dischou en eun daolenn hebken :

*rioullab*

	1973	1974	1975
n'o-deus bet embannet nemed eur pennad pe eur bajenn e brezonég	6	5	3
meur a bennad pe meur a bajenn vrezonég	23	19	22
kement ha kement a vrezonég hag a halleg	1	1	-
muioh a vrezonég evid a halleg	1	6	3
e brezonég penn-da-benn	11	18	18
en oll	48	42	46

Taolenn 7.

Euz eun eil bloavez d'egile ne feñch ket nemeur an niver a gelaouennou a vez o voulla brezonég. E gwirionez, n'eus nemed daou rumm anezo :

- ar re a vez skrivet evid ar muia e galleg, hag a ro tamm pe damm a blas d'ar brezonég. Er rumm-mañ e vo kavet kelaouennou euz an emzao, evel **Armor-Magazine**, **Bleun-Brug**, **Bretagne-Aujourd'hui**, **Ar Falz**, **Skol Vreiz**; kelaouennou politik, e-giz **Le Combat**, pe **Le Combat Socialiste**; ha neuze kazetennou pemdezieg pe sizunieg, evel **Ouest-France**, **La Liberté du Morbihan**, **Morbihan Éclair**, pe **La Bretagne à Paris**.

- an eil rumm a-bouez eo hini ar helaouennou a vez embannet e brezonég penn-da-benn. Ma ne vije ket euz ar re-mañ, anad eo ne vije ket embannet kalz a vrezonég ahendall. Rag (war eur bloavez nemedken eo bet greet ar gont) e 1974, an 18 kelaouenn a vez embannet e brezonég penn-da-benn a oa bet moulet ganto 65 % euz an oll bennadou bet embannet ar bloavez-ze (eur wech diskontet al leoriou.) Ar re a zo ar gwella diazezet eo **Barr-Heol**, **Al Liamm**, **Pobl Vreiz**, **Hor Yezh**, **Imbourc'h**, **Prader**, **Emsav**, ha **Brud**, daoust d'an diêzterioù he-doa homañ neuze da jom a-zao.

Damweled a heller amañ eul lezenn all e-keñver ekonomiezh. Rag kelaouennou diouyezeg, oh embann muioh a vre-

zonég evid a halleg, o-deus poan, war a zeblant, o kaoud hag eur stumm hag eun hent, ha setu perag n'eus ket anezo nemeur. **Ma tle beza, ha ma zo, kelaouennou diouyezeg e Breiz, eo kalz bihannoh enno peurvuia lodenn ar galleg** : da gredi 'zo n'eus "ezomm" ebed (ma vez digemeret amañ ar ger "ezomm" gand eun dalvoudegez a varhad, ha gand an dalvoudegez a hell rei dezaf eur prener) euz kelaouennou diouyezeg hag a vije brasoh enno lodenn ar brezonég. Kement-mañ a heller kompren moarvad dre ma hell kazimant an oll vrezonegerien lenn galleg, pa ne hell ket ar hallegerien - na kennebeud an oll vrezonegerien, anad da bep hini - lenn brezonég. En askont d'an dra-ze moarvad eo ez eus eur "horn ar brezonég" e meur a gazetenn.

Just a-walh, ar hazetennou pemdezieg ha sizunieg, ha beteg eur serten poent ar hazetennou politikel, eo o-devez ar muia a lennerien, an **Ouest-France**, da skwer, a veze prenet neuze gand 210 000 a dud en tri departamant a Vreiz-Izel : n'embannont nemed talvoudegez eun nebeud pajennou brezonég beb bloaz.

Ar helaouennou e brezonég penn-da-benn, int, o-devez an nebeuta a lennerien : euz tro eur hant bennag a goumananterien hebken evid lod, beteg tro eur milier, pe daou vil d'ar muia. Eun afer a zibab hag a choaz eo eta embann eur gelaouenn vrezonég, zoken ma n'eus ket, e-keñver ekonomiezh bepred, a blas eviti "war ar marhajoù" - ma vije kaset pelloh ar studi e vije gwelet moarvad n'eus kaji hini ebed oh en em denna e-keñver he budjed. Zoken ma vefe drol keñveria **Al Liamm** gand **Ouest-France**, e weler a-walh ne denn ar gelaouenn vrezonég nemed 0,5 % euz ar skwerennou a vez moulet gand eben evid Breiz-Izel hebken.

Diwar ar rollou bloazieg, e heller ive dond da houzoud pegement a vrezonég a vez moulet beb bloaz en oll. Diskouez a ra an daolenn war-leh ped pajennad brezonég a vez moulet ha liesskrivet en eur bloavez evid pez a zell al leoriou :

	leoriou moulet			leoriou liesskrivet		
	ped leor	ped pajennad en oll	ped pajenn dre leor	ped leor	ped pajennad en oll	ped pajenn dre leor
1973	9	820	127	6	538	89
1974	9	1552	172	27	1787	66

1975	14	2268	162	29	2068	71
en oll war 3 bloaz	32	4640	145	62	4393	71
"moyenne" ar bloaz	10	1546		20	1464	

Taolenn 8

Derhel a reer amañ da gonta a-stroll al leoriou "gwirion" hag ar re all, se zo sklêr.

Gweled a reer neuze :

- e vez liesskrivet kalz muioh a leoriou brezoneg, evid na vez moulet, nemed e 1973 (4). Eun drederenn hebken euz al leoriou eo a vez moulet, liesskrivet eo a vez an diou drederenn all.

- ez eus nebeutoh a bajennou el leoriou liesskrivet, eun hanter nebeutoh just, peogwir ez eus, euz an eil d'egile, 145 en eul leor moulet, e-kichenn 71 en eul leor liesskrivet.

Diskouez a ra c'hoaz kement-mañ ervad ez eo paour an embann brezoneg.

Ha ma vez klasket gouzoud ped pajennad vrezoneg a vez moulet en oll en eur bloavez, en eur gonta keñver-ha-keñver hag asamblez ar helaouennou hag al leoriou, setu amañ an daolenn all a gaver :

	leoriou		kelaouennou (a)		en oll		en oll
	moulet	liesskrivet	moulet	liesskrivet	moulet	liesskrivet	
1973	764		1276	3184	2040	3184	5224
1974	1460	352	1391	3137	2851	3489	6340
1975	2071	469	1135	3670	3206	4139	7345
moyenne	1431	273	1267	3330	2699	3604	6303

Taolenn 9

(a) en eur gonta amañ ar re a zo bet savet en o fez gand eur skrivagner hebken pe diwar-benn eun danvez hebken.

War an tri bloavez, euz 1973 da 1975, e heller eta konta o-deus bet al lennerien vrezoneg tro 6303 bajennad beb bloaz da lenn, well-waz, en o yez, ma felle dezo ha ma hellent, da lavared eo 2699 a bajennadou moulet ha 3604 a bajennadou liesskrivet, en eur gonta war eun dro an oll leoriou hag an oll helaouennou. An dra-ze, d'an neb e-noa c'hoant da lenn peb tra, hag en eur lakad e hellje henn ober, a ra tro 17 pajenn bemdeiz da voueta e spered d'eul lenner aketuz.

Kement ha keñveria, eo mad gouzoud:

- e kaver war-dro 22 bajenn bemdeiz (?), da lavared eo tro 6600 ar bloaz en eur gazetenn pemdezieg evel an Ouest-France. Nemed a vrasoh ment eo pajennou ar journal, ha moulet stankoh int ive.

- ez eus 1795 pajenn er "Petit Larousse", e lizerennou stank evel m'int peurliesha er geriaduriou. Ma vez dalhet kont euz an oll draou a vez liesskrivet e brezoneg, e hellje moarvad an oll embannadurioù brezoneg beza klenket ha klozet êzet tre e nebeutoh evid eur "Petit Larousse" (5).

- eo 22 261 a leoriou eo a zo bet moulet e bro-Hall e 1972.

Koulskoude, war an tri bloavez a zo etre 1973 ha 1975, eo bet kresket an niver a bajennadou moulet e brezoneg, hervez an dregantajou-mañ, an eil bloavez e-keñver an hini araog :

	moulet	liesskrivet	en oll
74/73	39,7 (4)	9,6	21,3
75/74	12,4	18,6	15,8

Eur statistik all a heller kaoud, ma vez laket e kont an niver a bajennou moulet e-tal an niver a referañsou bet embannet beb bloaz. Kaoud a reer neuze, hag ar wech-mañ c'hoaz, ez eus kresk euz an eil bloavez d'egile :

- e 1973 : 5,6 pajenn dre referañs
- e 1974 : 5,9
- e 1975 : 7,7

Eun dra all a zo anad avad diwar an daolenn 9, eo e lizerennou-moull eo e vez embannet ar peb brasa euz al leoriou " gwirion " e-keid ha m'eo liesskriva ouspenn eun hanter euz ar helaoennou eo a reer : eur zin all a baouren-tez. En oll, ez eo brasoh an niver a bajennou lieskrivet.

III

Ne jom ken med da êsê klask ped skrivagner, pe d'an nebeuta ped a dud, a vez o skriva e brezoneg.

Araog se, avad, eo mad gouzoud ne vez ket sinet eul lod kaer euz ar pennadou a vez embannet en or yez :

	referañsou dizano		referañsou sinet	
	en oll	dregantad	en oll	dregantad
1973	283	30,4	647	69,6
1974	364	34,3	695	65,7
1975	356	37,5	593	62,5

Taolenn 11

Uhel a-walh e vo kavet dregantad ar pennadou dizano, sur a-walh. Med en eur studia ar rollou skrivagnerien a zo bet savet beb bloaz, e heller dond a-benn da houzoud ive ped a referañsou a zo da lakad war gont peb skrivagner anavezet (6).

Niver a referañsou	1973		1974		1975	
	en oll	%	en oll	%	en oll	%
1	168	63,6	217	67,6	178	66,6
2	37	14	41	12,7	35	13,1
3	19	7,2	19	5,9	14	5,2
4	13	4,9	19	5,9	13	4,8
5	6	27	9	25	7	25
6	6		4		7	
7	3		1		1	
8	2		4		3	
9	1		1		1	
10 hag ouspenn	9		6		6	
en oll	264		321		267	

Taolenn 12

N'eo ket fall gouzoud ped a referañsou a zo da lakad en oll war gont ar skrivagnerien o-deus bet embannet 5 anezo pe ouspenn beb bloaz :

- e 1973 : 309
- e 1974 : 277
- hag e 1975 : 262

Gand se, e hellom bremañ keñveria an dregantajoù a skrivagnerien gand an dregantad a bennadou bet skrivet ganto (7).

	Niver a referañsou da lakad war gont peb skrivagner	1 hebken		5 hag ouspenn	
		% referañsou		% referañsou	
1973	% skrivagnerien % referañsou	63,6	25,9	10,2	47,7
1974	% skrivagnerien % referañsou	67,6	31,2	7,8	39,8
1975	% skrivagnerien % referañsou	66,6	30	9,3	44,2

Taolenn 13

Diwar an daolenn-mañ e weler ervad eo a-boan ma teu a-benn an 2/3 euz ar re a skriv e brezoneg - ha ne skrivont nemed eur pennad ar bloaz - da bourchas eun tammig muioh evid 1/4 euz an oll referañsou sinet e brezoneg. Padal, nebeutoh evid 10 % euz ar skrivagnerien - hag a gaver d'an nebeuta 5 a referañsou da lakad war o hont beb bloaz - int-i a deu a-benn da bourchas an 2/5 ha zoken tost tre d'eun hanter euz ar skridoù sinet. Diskouez a ra kement-mañ a-benn ar fin n'eus ket eur bern-ze a dud o voueta an embannadurioù brezoneg.

Bez' e heller gweled ouspenn beb pegeid e vez skrivet pennadou gand ar skrivagnerien. En eur geñveria ar rollou skrivagnerien euz an eil bloavez d'egile, eo bet kavet kement-mañ :

o-deus bet skrivet eur pennad d'an nebeuta	en oll	%
1 bloavez diwar 3	442	73
2 vloavez diwar 3	109	18
beb bloaz e-pad 3 bloaz	53	8
en oll	604	100

Taolenn 14

Setu en oll, n'eo ket  $264 + 321 + 267 = 852$  a dud eo a vez o skriva e brezoneg - evel a helljed beza tentet da gonta diwar ar honchou bloazieg - med 604 hag o-deus greet etre 1973 ha 1975. Kement-mañ a zeblant beza kalz ma vez dalhet soñj n'he-doa ket **Al Liamm** eur milier a goumante-rien zoken.

Ma vez greet eur gont hebken euz lennerien teir gelaouenn evel **Al Liamm**, **Brud ha Pobl Vreiz** - bez' e hellje beza tud hag a vije koumanantet d'eur gelaouenn vrezoneg all heb beza da hini pe hini euz an teir-ze, med moarvad n'eus ket eur bern anezo - n'eus ket muioh evid 2000 a dud o prena ingal kelaouennou e brezoneg penn-da-benn. E vefe neuze 600 bennag, da lavared eo eun drederenn anezo, o skriva ive er helaouennou o-unan, a zo kalz, hag a ziskouez e vez, beteg eur serten poent, savet ar helaouennou brezoneg gand ar re a vez o lenn anezo.

Med arabad ankounahaad evid se n'eus bet embannet nemed eur pennad hebken, etre 1973 ha 1975, gand an 3/4 euz ar re a skriva e brezoneg evid beza embannet.

Ar re a vez o skriva e gwirionez e brezoneg (n'eo ket evid pez a zell an talant pe an ampartiz o-deus pe n'o-deus ket e-keñver yez pe lennegez, med evid pez a zell ar gont a draou a skrivont) n'int nemed eun hanter-kant. Ne vo ket didalvoud moarvad rei amañ o anoioù :

	5 a referañsou hag ouspenn	10 hag ouspenn
1973	5 : J.C., S. Kidna, La Borderie, M. Madeg, N. Rozmor, Y. Troal. 6 : Jakez ar Bihan, R. Hemon, F.K., H.K., Fañch Kerrain, P. Diolier. 7 : ar C'horrigan, Charaban, A. Keravel 8 : Y. Olier, P. Penneq 9 : er Borgn.	10 : L. Andouard 11 : A. Duval 12 : Izan Vraz, Korli 13 : Klerg 20 : Herve ar Menn 41 : Raf Pondi 42 : P.-J. Helias 44 : Mabadad

1974	5 : F. an Uhel, Gwendal Denez, Evid ar Brezhoneg, R. Hemon, La Borderie, J. Philippe, Retamar, Bernez Rouz, N. Rozmor. 6 : Herve ar Menn, Kenvreuriez ar Brezhoneg, L. Kergoat, A. V. Trelu 7 : Kidna 8 : A. Keravel, UDB, E. ar Barzig, Jil Ewan 9 : Per Denez	11 : Y. Olier 13 : A. Duval 15 : Klerg 16 : Korli 47 : P.-J. Helias 58 : Mabadad
1975	5 : L. Andouard, Langleiz, Y.B. Piriou, H.K., Kerazern, F. Kervella, Goulc'hen Kervella, La Borderie, P.M. Mevel, Nono, Bernez Rouz, V. Seite. 6 : Mikael Briant, Jil Ewan, S. Kidna, E. Menard, Herve ar Menn, F. Morvannou, G. Pennaod. 7 : R. Hemon 8 : A. Duval, A. Merser, Y. Olier. 9 : J.C.	10 : UDB 14 : Klerg 17 : Treleger 31 : ar Stourmer 36 : Mabadad 37 : P.-J. Helias

Taolenn 15

Ha c'hoaz an oll re-ze ne skrivont ket beb bloaz o temp a referañsou, peogwir e weler ervad diwar an daolenn 12, ne vez beb bloaz nemed etre 25 ha 27 hag a heller lakad kement-se a referañsou war o ano.

Amañ c'hoaz avad, e vez gwelet eo, euz a galz, ar re o-deus ar muia a referañsou war o ano (Mabadad, Raf Pofdi, ha P.-Jakez Helias) eo a vez lennet gand ar muia a dud, peogwir e skrivont e-barz kazetennoù pemdezieg pe sizunieq (8).

\*  
\* \*

Chom a rafe c'hoaz, a-dra zur, meur a boent all da studia ouspenn, kouiz e-keñver ar skigna, hag e-keñver ekonomieq : ped skwerenn a vez tennet euz al leoriou, pegement e koust moulla pe liesskriva, pegeid e laker da werza eul leor,

ped skwerenn a werz ar helaouennoù, piou eo koumananterien ar helaouennoù brezoneg...

Red e vije ive, ma vije tu, ren ar studi en eur zerhel kont, tamm pe damm, euz talvoudegez ar skridou, na pa vefe nemed e-keñver yez, rag, evel a oar peb unan, brezoneg ha brezoneg a skriver. Eun afer all eo kement-mañ avad, hag a vo gwelet diwezatoù marteze.

Evid ar wech kenta koulskoude, da heul ar studiadenn a "vivliometri" on-eus greet, ez eus bet gallet kaoud chifrou - ha chifrou rezis - diwar-benn an embannadurioù brezoneg. N'eo ket ne vije ket bet anavezet dija mui pe vui unan bennag euz an evezadennoù on-eus greet, med bremañ e tie beza eun diazez solid a-walh da gomz euz pe z ez eo an embannadurioù en or yez. Evid kloza, e heller strola an disohou berr-ha-berr evelhenn :

- **Muih-mui a vrezonég eo a zo bet embannet etre 1973 ha 1975**, peogwir ez eus bet embannet e 1975 diou wech muih a leoriou "gwirion" ha tost da deir gwech muih a leoriou en oll, evid na oa bet greet e 1973. Muih a bajennadoù brezoneg eo a zo bet moulet pe liesskrivet ive, euz eun eil bloavez d'égile, peogwir eo bet kresket an niver anezo euz 21 % e 1974 e-keñver 1973, hag euz 15,8 % e 1975 e-keñver ar bloaz araog. **E 1975 koulskoude, e oa bet diskennet an niver a referañsoù d'ar gont ma oa daou vloavez kentoh, goude beza bet greet eul lamm a 8,6 % e 1974.**

- **N'eus forz penaoz, pe e vez kresk pe digresk, eo bepred war gonchoù bihan a-walh.** War dri bloaz, n'eus bet embannet nemed eur "moyenne" a 9 leor ar bloaz, ha ne hell al lennerien kaoud nemed tro 17 pajenn bemdeiz da lenn (er vent hag er stumm ma vez embannet ar pajennoù ze er helaouennoù hag el leoriou.) Da lavared eo n'o-deus ket zoken ar vrezonegerien talvoudegez eur "Petit Larousse" da lenn beb bloaz. Hag eo kalz pe nebeud ? Troet e vo lod da lavared n'eo ket divalo, moarvad, ma vez dalhet kont euz ar stad m'ema ar brezoneg. Hag a zo gwir. Med ken gwir all eo n'eo ket eur bern-ze kennebeud.

- Her hompren a reer, **ken dister ha ma seblant beza an traou gand an embannadurioù brezoneg.** Liesskrivet eo e vez ouspenn eun hanter euz ar helaouennoù, hag an diou drederenn euz al leoriou en oll; ouspenn eun hanter euz al leoriou ive a vez embannet dindan stumm eun niverenn euz eur gelaouenn.

Eun afer a volontez eo, barz ar gont-se, embann brezoneg, se zo re sklêr diwar an dregantad a bennadoù - an diou drederenn - eo gand kelaouennoù e brezoneg penn-da-benn

eo e vezont embannet. **Med ma 'z eo ar helaouennoù brezoneg eo ah embann ar muia a bennadoù, int-i eo o-devez an nebeuta a lennerien :** ne dle ket beza muih evid 2000 a dud o prena ingal kelaouennoù brezoneg. Er hontrol, ar hazetennoù ha n'embannont nemed eur "horn ar brezoneg" hag ar helaouennoù ha n'embannont nemed eun tamm bennag a vrezonég, eo a hell o 'fennadoù beza lennet gand ar muia a dud.

- **Al lennerien, just a-walh, eo lennegez eo a vez kinniget dezo evid ar muia,** peogwir eo d'al lennegez eo e tenn 40 % euz an oll referañsoù hag 50 % euz al leoriou. Ouspenn, eo euz brezoneg eo ez eus kaoz en eun drederenn all euz al leoriou (hag e 10 % euz ar referañsoù.) Ma kaver a-walh pennadoù da lenn er helaouennoù diwar-benn traou all (politikerez, istor, pe memez diwar-benn broiou all...) evid pe z a zell al leoriou avad, ne vez ket embannet nemeur anezo ha ne vijent ket leoriou a lennegez pe leoriou brezoneg.

- Daoust hag eo gand seurt danvezioù eo e hell beza dedennet al lennerien ? Re ar helaouennoù brezoneg d'an nebeuta, peogwir e teu êz a-walh unan diwar dri anezo da skriva e-unan : m'eo 2000 den eo a vez o prena kelaouennoù e brezoneg penn-da-benn, eo 600 a dud eo a vez o skriva brezoneg en oll. Koulskoude, **eun 50 a dud nemedken eo a vez pourchaset ganto tost a-walh d'eun hanter euz an embannadurioù brezoneg. Warno dreist-oll eo ema diazezet an embann brezoneg.**

Ma ne vije ket euz an 50 a dud-ze o lakad o foan hag o halon - hag o lorch ? - da skriva en eun eiz a gelaouennoù dreist-oll, ma ne vije ket daou pe dri di-embann o lakad tro 9 a leoriou da zond er-mêz beb bloaz, ne vije ket embannet kalz a vrezonég ahendall. Med pa weler pegen nebeud a dud a vez ahendall o lenn brezoneg ingal, e heller en em houlenñ pelloh hag-efi e kinniger d'an danvez-lennerien - da lavared eo d'ar vrezonegerien - ar pe z a vefent en gortoz da gaoud. Gwir eo ez eus er heñver-mañ daou stumm d'en em gemer. Pe soñjal ez eo d'al lennerien d'en em ober ouz an danvez-lenn a ginniger dezo. Pe ar hontrol.

F. Broudic

(1) Embannet eo bet labourioù F. Broudic gand ar C.R.D.P., 92, rue d'Antrain, B.P. 158, 35003 Rennes-Cedex.

(2) En eur lenn ar studiadenn-mañ e vo soñj da gaoud dalhmad ez eus 37 a referañsoù euz ar bloavez 1973 ha ne ket bet gallet konta nemed da heul re ar

bioavez war-lerh. Ouspenn, ne oa ket bet laket er henta roll, hini 1973, eun toulladigou traou, evel al "lizerou" a vez embannet e kalz kelaouennou. Setu ma tle mankoudeun 10 pe 15 all a referañsou ar bioavez kenta. Se a die ober eur holl a 5 % pe war-dro evid 1973, hag eur gonid a dost kemend-all evid 1974.

Leoriouigou (eun hanter-dousenn bennag) koulz ha pennadoù eo a oa euz ar 37 a referañsou-ze euz 1973.

(3) Al leoriou a beb seurt se a zo anezo : jeolojiez, ekonomiez, bannou treset, keginerez, stourm evid ar yez...

(4) Gweloud an notenn 3 a-uz.

(5) En eur "Petit Larousse", ez eus war-dro 16 000 000 a lizerennou-moull (hag a vez anvet "signes" e galleg). Lakom e hellje beza tost da vad tro 1 800 lizerenn-voull dre bajenn voull, ha 1 500 lizerenn dre bajenn liesskrivet (pez na vez ket gwir atao : a-wechou e vez stankoh al lizerennou, a-wechou all eo ar hontrol), eo tro 10 200 000 lizerenn eo a vez embannet a vrezonég en eur bloaz, hag e weler neuze e tleje braoig oll embannadurioù brezonég eur bloavez mond en eun 2/3 euz eur "Petit Larousse".

(6) Sina a hell ar skrivagnerien o fennadoù pe dindan o ano-famill, pe dindan eun ano-pluenn, pe c'hoaz dindan pennlizerennou nemedken. Ma teu da unan sina koulz dindan e ano-famill ha dindan e ano-pluenn, ha m'eo anavezet an eil hag egile evid beza ar menez den, n'eo bet kontet nemed eur wech. Ahendall, eo bet kontet diou wech. Hefvel pa oa kaoz euz pennlizerennou.

(7) N'eus bet dalhet kont amañ nemed euz ar pennadoù sinet.

(8) Eur pennad e brezonég en eur gazetenn sizunieg pe bemdeziég, ne vo ket lennet dre red gand kement hini e-nevo bet prenet ar gazetenn, anad eo. Nemed unan hag a skriv en eur gelaouenn hag a dremen dre zaouarn kalz a dud, a hello beza lennet gand muioh a dud, evid an hini ne vez nemed nebeud a dud o prena ar gelaouenn ma skriv enni. Kaoz soñj ouspenn-ze ez eus en eur gêr vraz evel Brest tost da 6 % euz an dud hag a lavar int barreg da lenn brezonég (daoust ma n'eus nemed 8 % barreg da gomz : gweloud diwar ze, Brud Nevez n° 19, p. 27). War ar mêz, leh ma zo muioh a vrezonegerien, e tle beza muioh a ze a zavez-lennerien.

## LENNADENNOU

### AR VRETONED O TIGEMER AN DOURISTED...

Just a-raog an hañv, eo deuet er-mêz eil leor Serge Duigou hag ez eus kaoz ennañ penn-da-benn euz an douristelez : "la Bretagne ayant dansé tout l'été" (1). Lakad a ray kalz da skrijal sur mad, hag e tle beza bet greet dija, netra 'med ar golo anezañ. Rag war ar golo e weler poltred eur Vretonez, gwisket en he dillad giz Foues, hag a zo bet taolet eur podad liou rouz ouz he fas. Sed aze hag a ro dioustu d'al leor eur feson a sakrilaj.

Daoust hag e-neus bet c'hoant S. Duigou da zisklêria ne raje ar Vretoned nemed dafsal e-kerz an hañv, hag eh en em gavont gwall-dibourvez pa deu an diskar-amzer war-lerh ? E-pad an hañv e vez ar Vretoned e gwirionez o tigemmer an douristed, ha war an ton braz peurlies. Ar goñversanted ne vezont prederiet nemed gand se: gouelioù ha festoù a beb seurt a vez savet evito - med eun tamm bennag evid tud ar vro ive memestra; evid an douristed ive eo e vez savet tiez braz pe vihan war vord an aot, porziou-plêzañs, henchoù nevez, ha kant ha kant tra all hag a ziskouez S. Duigou e teount aliez da ger; ha n'eo ket bepred ar re a vez o tarempredi ar porziou-plêzañs eo a bê ar muia evid o hennenn.

Med eun dra all a ziskouez c'hoaz an Duigou n'heller ket tremen heb an douristed ken e Breiz. N'eo ket hebken na vije ket a aon ken rag ar ouenn dud se; n'eo ket hebken e ver deuet da voaza ha da gustumi outo; med deuet e ver da gaoud ezomm anezo. Evid brasa mad ekonomiez ar vro evel just - pe d'an nebeuta evid mad portemone tud 'zo - dreist-oll p'he-devez poan an ekonomiez oh en em zerhel ahendall; med ezomm a zo anezo ive evid lakad muioh a vuez er vro : piou n'e-neus ket bet kavet marvoh ar vro eur wech ma 'z eo bet eet an douristed diweza kuit ?

Ar pez e-neus greet Serge Duigou eta eo derhel eur seurt kalander, konta a zeiz da zeiz petra eo an tourism e Breiz, peseurt darempredoù a vez etre tud ar vro hag ar re a-ziavéz, piou eo a vez o tiwall an natur ha piou na vez ket. A-wechou e kavo da lod ez a re bell ganti, med n'eo ket dispiluz lenn e leor, frealuz eo zoken e meur a gêver.

### ... HAG O KLASK HENT AN DISPAH

Euz an douristed eo e ra kaoz ive Michel Le Bris azaleg pajenn genta e leor "L'homme aux semelles de vent" (2). En e genta pennad e komz euz amzer e yaouankiz, e tro Plougasnou, e kêriadenn Sant-Samsun. Dioustu war-lerh ar brezel diweza, eo e oa komañset an douristed da zond niveruz da dremen eur pennad amzer vakañsou e kostez an aot, ha fenti diwar o houst eo a ree da genta ar Vretoned, dreist-oll pa welent anezo o vond da neuial er mor, hanter-noaz.

Michel ar Bris e-neus gwelet anezo oh erruoud hag oh ober o aotrounez, rag n'eo nemed deuet krennard eo e kuitaas e vro henidig da vond da Bariz, dre ma oa eet e vamm da labourad e ti eun aotrou bennag. Efi a zo bet klevet komz dioutafi er bloaveziou tremenet pa h eo bet unan euz ar re ar muia anavezet euz ar vaoisted. Med hirio n'ema ken ganto ken, ha just a-walh ar pezh a ra danvez e leor eo a-benn ar fin an hent e-neus heuillet euz amzer e yaouankiz beteg hirio.

Ha gand eun tamm keuz eo e vije troet da gomz euz an amzer-ze, o softjal e veve gwelloc'h an dud neuze, pa n'o-doa ket a zleou, ha pa ne oa ket re a brez warno dalhmad. D'ar houlz ze ne oa ket braz ar menajou, e oa muioh a dud war ar mêz, ne veze ket labourer evel bremañ. Med daoust hag ema ar wirionez gand Michel ar Bris ? Ne lavar ket d'an nebeuta penaoz o-dije bet gallet ar Vretoned derhel da vev evel ma reent araog ar bloaveziou hanter-kant.

Ar pezh a ra, avad, eo displega penaoz eo deuet ar Stad da veza gallouduz ha mestr war beb tra : poursu a ra an oll re n'int ket prest da zenti outafi, ar Yuzevien, ar glaskerien vara, ar re zod, ar vicherourien ha ne fell ket dezo labourad kement ha ma vez c'hoanr da lakad anezo d'ober, ar beizanted ha ne fell ket dezo plega da lezennou nevez ar marhad.

Daoust hag ema neuze Michel ar Bris o vond da vale war roudou ar varxisted hag o-deus bet disklêriet e meur a vod abaoe Marx ema ar Stad da veza diska- ret ? Tamm ebed, rag ma 'z eo bet eun diskibl da Vao e-pad eun toulhad bloaveziou, n'eo ket ken, ha diouz e zofj ne vije ket en deiz a hirio dre ar bed gwasoh divennerien euz ar Stad evid n'eo ar varxisted. " N'eo ket el leoriou, eme Michel ar Bris, eo e vez desket ober an dispah. " Neb e-neus c'hoant d'ober an dispah, eo eun hent all eo e-neus da zibab, na pa vefe nemed nompaz kaoud aon da c'hoarzin, da c'hoarzin druz ha frank, c'hoarzin d'ober goap diwar goust an oll dud eun hanter re siriuz a vez o ren peb tra war an douar.

N'eus ket bet komzet nemeur deuz leor Michel ar Bris amañ e Breiz, daoust m'eo daou vloaz 'zo bennag m'eo deuet er-mêz (3). Ar re a vez dre amañ oh embann eo ar Vretoned eur ouenn a dud libr ha ne fellfe ket dezo douja d'ar Stad, pe ar re a vez o tisklêria n'eo ket ar marxism diouz doare ar Vretoned, a rankje, an eil re hag ar re all, beza bet digemeret mad anezafi. Ha koulskoude ma n'o-deus ket greet eo marteze dre ma fell bepred d'or skrivagner beza eun dispaher, hag an oll, kaer a laront a-wechou, n'int ket prest d'ober an dispah.

Henchou nevez a garje-efi neuze kaoud d'ober an dispah, pe gentoh, e karfe adkaoud an henchou koz a-wechall, an doareou ma ree ganto an dud araog, da zerhel penn d'ar pennou braz. Daoust hag e hell e gwirionez, ha piou a zo prest da vond d'e heul hirio deuz an tu-ze ? Eun afer all eo kement-mañ, med e leor Michel Le Bris ez eus eun dra bennag ha ne gomprenet ket re vad, eo perag e skriv eo a-bouez derhel d'e wriziennou, pa ne zeblant ket beza bet klevet biskoaz komz brezoneg e Breiz-Izel, kaer e-neus beza bet ganet war ar mêz. Daoust ha divenn ar yeizou bihan evel ma ra en e leor na vefe nemed eur mennoz ?

F.B.

---

(1) Le Signor, Pont 'n Abad.

(2) Grasset.

(3) Ema koulskoude kelh keltieg Redon o vond da zével eur pezh diwar " L'homme aux semelles de vent. "

En niverenn-mañ euz Brud Nevez, e vo lennet eur gontadenn all diwar bluenn P.-J. Helias - eur gontadenn euz an amzer ma oa " al letrissime " oh erruoud er vro - ha neuze, " Ar Marh Dall ", ar ganenn-veur a zo bet savet gand Job an Irien ha René Abjean, evid kana buhez, poaniou hag esperâns an dud. Dirag ilizadou-tud eo bet kanet " Ar Marh Dall " e-kerz an hañv, gand Lazou-kana Penn ar Bed.

Eur studiadenn brisiuz a vo kavet da lenn ive, gand Fanch Broudig, gand e-leiz a statistikou. Greet e-neus meur a gont : e hellje mad-tre oll embannaduriou eur bloavez beza klozet en eur " Petit Larousse "; eo d'al lennegez eo e tenn ar peb muia euz an embannaduriou; n'eus ket muioh evid 2000 a dud o prena ingal kelaouennou brezoneg; hag eo gand eun 50 a skrivagnerien nemedken eo e vez pourchaset eun hanter euz an embannaduriou en or yez. Ar wech kenta eo ma h embanner chifrou resiz diwar-benn an embannaduriou brezoneg.

---

Au sommaire de ce numéro, un nouveau conte de P.-J. Helias - un conte du temps où l'électricité arrivait dans la région; et la cantate " Ar Marh Dall ". Cette cantate, écrite par J. Irien, mise en musique par René Abjean, veut assumer un riche et lourd héritage comme composante d'un présent difficile et d'un avenir plein d'incertitudes. Elle a été interprétée devant un public nombreux et passionné, cet été, par l'Ensemble Choral du Bout du Monde. L'étude de F. Broudic sur l'édition de langue bretonne est précieuse car c'est la première fois que l'on publie sur ce sujet des statistiques précises. Il a ainsi établi que l'on pouvait rassembler l'ensemble des publications en langue bretonne d'une année en un " Petit Larousse "; que la plus grande part des publications se rapporte à la littérature; que les acheteurs de périodiques en breton ne sont pas plus de 2000; que c'est à une cinquantaine d'écrivains seulement que l'on doit la production de la moitié de la production de langue bretonne. Une étude indispensable.